


701
—

OLLIVIER 701 b



GUERS NEVEZ

VAR AR MUNTR

A PER GUEGUEN

HA VAR JUJAMANT

A JOB AL LANN

Accuset da veza bet e assassin

Composet gant A. OLIER, Instituteur publik

Var don : *An disput etre ar Maro hag an Den demezet.*

1

Habitantet a Vreiz, selaouit en antier,
C'hui specialamant, pobl eus a Finister ;
Selaouit recita ar c'hruella torfet
A guement e veleur en histor rapportet.

2

Serijal a ra an oll o clevet quement-mâ :
Va zeod a ven selaci pa fell d'in e c'hana ;
Rac eun horreur eo compren e ve eun den capabl
Da zont da gometi eur c'hrim quen execrabl.

3

Cals a ganouennou a veleur debitet
Var sujet maleürion n'int nemet suposet ;
Mes var ar recit-ma n'en d'eus den douetanc,
Quement-ma zo re vir, siouas ! en assuranc.

En nosvez divêza demeus a vis gouere,
Er blaves mil eis cant daou varnuguent goude,
Tost da Landivicho, e milin Cazuguel,
E zeo bet erruet eur malheur quer cruel.

Eno eun tad a famill, e hano *Per Gueguen*,
Eun tiec puissant, fabricant bras ouspenn,
Adjoent en e ganton, Electeur ha Jure,
Zo gant tri dol poignard treuzet en e vele.

Horreur oc'h eus certen o tonet da glevet
E ve en e di prob, en e vele lazet
Eun den fur hag honest, hag a gondition,
Hag a r respectapla a voa en e ganton.

Quement-se, 'n assuranc, zo eun torfet barbar ;
Ennes eo goassa crim ze grêt var an douar.
Pa n'ellomp repari netra gant hon daëlou,
Expplikomp, m'ar guellomp, darn ar circonstançon.

En amzer-ze *Gueguen* a laq'e batissa ;
Nombr bras artisanet a voa neuze ganta :
Bep nos e couskent oll tranquil ha disourci,
Hep sonjal e teuje netra'n tout d'ho zroubli.

Ann or demeus an ti ne voa ket en e flaç.
Rac tout en em fizient var an dud hag ar chass ;
Mæs eun den fall benag, gant an diaoul possedet,
A c'hostos ar moment da ober an torfet.

Hag en zo den er bed en d'eus clevet parlant
A zen qnen effrontet ha ma voa ar mechant ?
Tremen abiou tud-all a alle e velet,
Eur c'hlaou dir en e zorn, hep na spont na morc'hed.

11

Arret, den miserabl, arret, muutrer infam !
Respet ar repos douç eus eur galon divlam,
Mes, allas ! maleürus, te a zo possedet
Gant arrach an ifern ; ne c'heus respet ebet.

12

Eun arm a dri c'harre eo bet an instrument
Gant p'ini e lazet, siousas ! cruellamant.
Tri dol en he c'houzoug en devezs recevet,
Da visa d'e galon : comprenit an torfet.

13

Eur g'emaden benag dre boan en d'eus græt,
Ma ze bet divunet unan eus ar plac'het,
P'ini eus e guele a sao incontinant,
Hag e elum goufou gant cals ampessamant.

14

Pebes spectacl scrijus ! O rancontr effroyabl !
Guélet a ra he mestr o teurel e oll goad,
E zorn var e c'houzoug, o clasq en arrêti,
Ha daoust da guement-se e tiruil var an ti.

15

Ouman, en eur grial e devezs divunet
Ar c'hreg, ar vugale hag an domestiket ;
Ha setu leun an ti anezo var an heur,
Mantret ha trubuiliet o velet ar malheur.

16

O pebes tra spontus d'an oll assistantet !
Eus ar mæs e c'hallet distinctamant clevet,
Pa denne e alan, ar goad o tifustral
Dre'n toullou en doa græt enna an arm fatal.

17

An oll a c'houlenne gant cals a nec'hamant,
Penaos oa erruet eur c'hrim quen effrayant :
Den abet na vouie, pas *Gueguen* e-unan ;
N'en devoa santet tol divar an tol quenta,

18

Ar c'hri-fors, an allarm, ar gonsternation,
Ar glac'har, an anken, an desolation,
O d'eus ho zroublet oll hep e sonje hini
Mont da glasq medicin evit er soulaji.

19

A la fin, pa veljont oa danger a varo,
E casser ar c'helou da gear Landivicho
Ha da gear Montroulez, da glasq medicinnet,
Ha cals incontinant a zo en em gavet.

20

Gant an Doctoret-se pa ze bet bizitet,
A eur memes moues ho devez lavaret :
N'en d'eus remet ebet, ar blessou zo mortei ;
An den-ma zo dija var ar poënt da vervel.

21

Evel n'en d'eus netra impossubl da Zoue,
E choumas e buez eun tregont heur goude,
Hag en d'eus recevet e holl sacramanchou
Gant cals eus a ferveur hag a induljançou.

22

Gant Person e ganton e bet administret,
Hag ar C'hure hag en ho d'eus en assistet
Betec e dremenvar ; gant eur zel onctius,
Ha d'eus-en disposet da eur maro eürus.

23

Enfin p'en d'eus santet e dermen o tostâd,
E c'houlen ous an oll pardon a galon vad,
E quimiad dious e famill ha dious an oll present,
Hag e lavar adieu d'ar bed antieramant.

24

Goude e c'himitas Jesus-Christ, hor Salver,
Rac goulen a ras pardon ous Doue d'e vuntrer ;
Raetal e tremenas gant eur visach laouen,
Goude scuilla e voad, evel ar verserien.

25

Minoredigou gueis ! petra reot-u bremâ ?
Lamet e diganeoc'h ho souten er bed-mâ :
Eur monst' eus an infern en d'eus lazet ho tad.
Guela dleomp oll gueneoc'h var eur seurt calonad.

26

Piou an den detestabl, piou an den milliguet
A zo bet touellet d'ober eur seurt torfet ?
Piou eta, christenien ? Doue hag ar muntrer
A voar en assuranc, piou zo cos d'ar malheur.

27

Ne elle den exprima, n'eus den evit compren
Peguement a c'hlac'har, peguement a ankern
Ho devezs en antier an oll dud dre ar vro,
O clevet ar recit eus a eur seurt maro.

28

Domach e d'ar bourc'his couls ha dar paisant,
D'an artisanet queis, ha d'an negociant,
D'ar c'hanton en antier, ha dreist-oll d'ar beorien,
E domach ar maro demeus a *Per Gueguen*.

29

Eus a greis e yec'het, a greis e blijadur,
E ze bet commetet varnezan ar malheur ;
Da bemp bloaz ha tregont, ô trubuill ! ô horror !
E ze bet enlevet digant c'hueac'h minor.

30

Cre oa damperamant a guement a veljet,
A dail avantajus, a bell hent conformet ;
Modest bras ha joaüs ato a garracter,
Laouen ha generus, humbl, douc ha deboner.

31

Brema e c'houlennot ouzin, assistantet,
Penaos e zeus bet var *Al Lann* soupçonnet
Me en lavaro deoc'h ebars en ber gomsou,
O tont da expliqua darn eus an demarchou.

32

Pa zeu ar sclerijen goude 'n nosvez trist-mâ,
A ere avoualc'h an deiz da allout distinga,
An oll a reas eur c'hlasq ha dre'n hent ha dre gear,
O clasq disoloï an tress eus ar muntrer.

33

Cavet e zeus erfin eur roudou merket mad,
A brouve e voant græt en noz a zivezat,
Dirijet etreze an ti directamant,
Ha da zistreï en dro ive egalament.

34

Goude ho pissellet, e zeus a dost d'an ti,
Guelet roudou lerou imprimet mad er pri ;
Quement-se a zo tout suspect en peb fêçon,
A ra d'an oll dud fur concevi mil soupçon.

35

Cals a estonamant ho pezo assuret,
Pa gléfot piou a zo eus ar c'hrim accuset,
Pa velot e gundu a brison da brison,
E gondaon d'ar maro var ar skeud a soupçon.

36

D'abord eus tamallet d'eur mevel meliner
En doa servichet en ti-se pell amser ;
En doa bet gant e vestr ambrouill ha differant,
Ma rankas e guitad hep ober complimant.

37

A eur memes lavar an oll ho d'eus tolet
Var cont au domestik ar c'hrim hag an torfet.
En instant, ar justic a zo avertisset,
A gassas archerien evit e guemeret.

38

En eur antren en ti ho devezs goulennet
Ar mevel meliner, hag eus deo respontet :
Ed eo en e vele eun nebeut da repos,
Rac n'e ket bet er gear easi evit an nos.

39

Tostet eus ar guele, er c'haffjont cousket mic,
Evel eur seraphim pe eun eal seraphic,
Ha ma leverjont dezan : Sao eus da vele pront,
Rag rapportchou terrubl zo laket var da gont.

40

A zindan ar guele e caver e voutou,
Vær eur bank e kichen 'voa ivez e lerou,
Ha dre eun tol hazard, e zeus er gamb cavet
Eun instrumant evel instrumant an torfet.

41

Eur boutou, eul lerou, leun a fanq hag a bri,
Eur baïonnetes lem, cavet er memes ti,
A ras conjecturi d'an oll assistantet.
E zoa ar malheürus en doa græt an torfet.

42

E ker Landivicho e neuse prisonniet ;
Souden da Vontroulez e ze bet cunduet :
Eno e chom eis mis, kent monet da Guemper,
Eleac'h ma ze da guenta instruiset an affer.

43

Nao dest ha daou ugent zo bet interroget
En tribunal Kemper, var sujet an torfet,
Ha goude ho selaou, e zeo bet condaonet
Gant an oll varnerien, da veza dibennet.

44

Ervez ar lezennou, oa permettet dezan
Cass e varnedigues evit examina,
Ha tribunal Paris en deveus ordrenet
Ma vije er vech-ma barnet en kear Guenet.

45

Eno ar memes testou ha cals a re nevez,
An intanves memes zo sinifiet ivez,
Zo bet interroget rigouriusamant
Gant ar varnerien eus an departamant.

46

Pebes inversion ! pebes chenchamant !
Criminal en Kemper, hag e voa innoçant ;
Gant barnerien Kemper a zeo bet condaonet,
Laket en liberte gant barnerten Guenet.

47

Cetu eur guentel gaer d'ar bed oll en antier,
Dre behiui e veleur patantamant ha sklær,
N'en d'eus nemet Doue a ell assuramant
Absolv pe bunissa gant justic ar mechant.

48

Enfin, pe ze coupabl, pe otramant n'en de quet,
Doue hag e er goar : daoust n'er gousomb-ni ket ?
Deis ar varn general ni a velo ive,
Petra zo bet pen-cos eur ar c'hrim horribl-se.

49

Distroet eo d'ar gueur gant laouenediguez,
Souden e tosteas oc'h ti an intanves,
Pini en recevas gant cals a joüsder,
Evel a ziaguent da vevel meliner.

50

N'e quet bet pell amser er vech-ma en he zi,
N'ho devezs concluet dont d'en em zemezi ;
Mes ar civil, an ilis ho devezs contestet,
Faut formaliteou ne voant quet observet.

51

N'ellan lavaret mui vit ar moment present,
Nemet ma c'hesperan hep tam douetamant,
E vezir invitet ar c'henta d'an euret,
Peur benac e vezo an daou-ma demezet.

Propriété.